



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Aotrou B.Rault

Rener Frañs 3 Breizh

9, bali Janvier - CS 44015

35 040 ROAZHON sedeks

D'an 18 a viz Even 2012

Eil-skrid da : - Ao. Jean-Yves Le Drian, prezidant Kuzul Rannvro Breizh
- It. Lena Louarn, eil-prezidantez Kuzul Rannvro Breizh e-karg deus ar yezhoù
- Ao. Fulup Jakez, rener Ofis Publik ar Brezhoneg
- Ao. Bernez Rouz, e-karg deus an abadennoù brezhonek e Frañs 3

PAL : krouiñ ha skignañ programoù brezhonek evit ar re yaouank

Aotrou,

Desket hon eus nevez 'zo emac'h e sell da zihan da grouiñ abadennoù brezhonek evit ar re yaouank kerkent hag en distro-skol a zeu. Skoet omp bet gant an dibab reut-se graet ganeoc'h evit espern arc'hant, ha fellout a ra dimp embann hor soñj deoc'h gant al lizher-mañ.

Ganet e oa ar program « **Mouchig-Dall** » nav vloaz 'zo bremañ. An 23 munut a vrezhoneg-se gouestlet d'ar vugale a zo deuet da vezañ tamm-ha-tamm ur prantad a-bouez e-kerzh sizhunvezh ur bern familhoù deus ar vro. Brud vat he deus tapet an abadenn er skolioù Diwan koulz hag er skolioù divyezhek. Derc'hel a ra ar skolioù-se da greskiñ, evel ma ra bed an dudi e brezhoneg... ar pezh a ziskouez ez eus ur goulenn sokial koulz hag un nerzh war an dachenn-se. Ne c'hall ket Frañs 3 chom hep teurel pled oute. Ouzhpenn da se e vez brav d'ar vugale ha d'ar grennarded kavout programoù brezhonek fresk ha dedennus.

Stag eo ar Vretoned ouzh o yezh, hag ur gwir eo kaout ur servij kleweled foran e brezhoneg. Unan deus kefridioù Frañs 3 Breizh a zo krouiñ ha skignañ programoù brezhonek nevez, modern hag a galite. Dre an tailhoù paeet evit ar c'hleweled koulz hag ar skoazelloù arc'hant roet gant Kuzul Rannvro Breizh d'ho chadenn evit an dra-se e pae ker-ruz ar Vretoned evit kaout ar programoù-se.

Se 'zo kaoz e c'houlennomp ganeoc'h dilezel ar pezh a oa bet divizet ganeoc'h, ha derc'hel da grouiñ ha da skignañ muioc'h-mui a abadennoù brezhonek war pemp departamant Breizh.

Da c'hortoz ur respont deus ho perzh, resevit, Aotrou, hor gwellañ soñjoù.

Strollad Ai 'ta !
ai.ta.breizh@gmail.com



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Monsieur B.Rault

Délégué Régional Antenne et Production

Frañs 3 Breizh

9, avenue Janvier - CS 44015

35 040 ROAZHON cedex

Le 18 juin 2012

Copie à : - Mr Jean-Yves Le Drian, président du Conseil Régional de Bretagne

- Mme Lena Louarn, vice-présidente du Conseil Régional de Bretagne, en charge de la politique linguistique

- Mr Fulup Jakez, directeur de l'Office Public de la Langue Bretonne

- Mr Bernard Le Roux, en charge des émissions en langue bretonne à France 3

OBJET : création et diffusion de programmes en langue bretonne pour jeune public

Monsieur,

Nous avons appris récemment votre intention d'arrêter, dans un souci d'économies, la production d'émissions en breton à destination du jeune public, et ce dès la rentrée prochaine. Cette décision brutale nous choque et nous tenons à vous le faire savoir par ce courrier.

En effet, cela fait maintenant neuf ans que le programme « **Mouchig-Dall** » a vu le jour. La diffusion hebdomadaire de ces 23 minutes de langue bretonne dédiées aux enfants est devenue au fil des ans un rendez-vous incontournable dans de nombreuses familles bretonnes. La popularité de l'émission dans les écoles Diwan et bilingues le prouve s'il en était besoin. Par ailleurs, le constant développement de ces filières d'éducation, ainsi que des loisirs en langue bretonne, démontrent une demande sociale croissante et un dynamisme que France 3 ne peut ignorer. Les enfants et adolescents doivent par ailleurs pouvoir bénéficier de programmes en breton renouvelés et correspondant à leurs attentes.

Les Bretons sont fortement attachés à leur langue, et bénéficier d'un service audio-visuel public en breton est un droit. La création et la diffusion de nouveaux programmes en breton, modernes et de qualité, participent des missions qui sont celles de France 3 Bretagne. Les contribuables bretons, par l'intermédiaire de la redevance audiovisuelle et des aides financières accordées par la Région Bretagne à votre chaîne à cet effet, contribuent largement au financement de ces programmes.

En conséquence, nous vous demandons de revenir sur votre décision et de développer la création et la diffusion, sur l'ensemble des cinq départements bretons, des émissions en langue bretonne.

Dans l'attente de votre réponse, veuillez agréer, Monsieur, nos sincères salutations.

Le collectif Ai'ta !

ai.ta.breizh@gmail.com